

AR C'HEMENER

Var ton: Calz a amzer a meus collet.

Eur C'hemener ne deo qet den,
Fardi bidao, oao, oao, oao ;
Eurdi C'hemener ne deo qet,
Neo nemet eur C'hemener hepqen.

Ne dle qet beza entêret,
Fardi bidao, oao, oao, oao, oao ;
Ne dle qet beza entêret :
Nac en ilis nac er vèret.

Hoguen e corn ur soulet qerc'h,
Fardi bidao, oao, oao, oao, oao,
Hoguen e corn ur soulet qerc'h,
Oll chass ar baros var e lerc'h.

Ha ped a gaz ha ped a gui,
Fardi bidao, oao, oao, oao, oao ;
Ha ped a gaz a ped a gui,
Peb a lunedou var o fri.

Ha peb a fleur en o guinaou,
Fardi bidao, oao, oao, oao, oao ;
Ha peb a fleur en o guinaou,
Da gana *Requiem* da vuntrer al laou.

Pa ha'r C'hemener d'an dançou,
Fardi bidao, oao, oao, oao, oao ;
Pa ha'r C'hemener d'an dançou,
E carg e sac'h a vesqennou.

Evit ma laro ar merc'het coant,
Fardi bidao, oao, oao, oao, oao ;
Evit ma laro ar merc'het coant ;
Ar C'hemener en deus arc'hant.

Pa ha'r C'hemener da c'hriat.
Fardi bidao, oao, oao, oao, oao ;
Pa ha'r C'hemener da c'hriat,
Ne ra nemet cana ha c'houtellat.

Nemet cana, cravat e ben,
Fardi bidao, oao, oao, oao, oao ;
Nemet cana, cravat e ben,
Ha muntra al laou hac ar c'hoen.

E Montroulez, eus a Imprimerie LANOÉ.